

Dastumad Pennwern : dornskrid 89

75. MAM BE ME EUN TAM AMZER

(follennoù 231 - 233)

Ma me eun tamik amzer, pluen liou a paper guen
eur voutaillad vin em c'hever hag eun tass pe eur veren
Me lakaïe va fantazi da komposi eur kanoen

Kalz a guer zo defot din kent evid komanç rimat
Speret da komposi a soin a parfeti da genta
Speret a zistro d'he c'hompren a mouez evid e c'hana.

Kombati a ra va speret var kalz a sujedou
Amouroustet a karantez a quentel ar goal deodou
Ar sirconstanç dimeus ar sonn en tri foent greed e vezo

Me e nem lakan va humeur en faveur an oll woazet
Da bleidi an aneversite var sujet an amouroustet
Ne ouffe den konta ken reiz evel a re zo bet paket.

Me ia breman da ober al lez da eur plac'h ag a garan
Mar ro dime audianç va gouëch kenta he ouman.
Da lavaret eo dam faltazi an hini garan muia

- Debonjour deoc'h, plac'h yaouank, setu me deud dagoële
Gant esperanç a karante hag eun amitié parfait
Da konta deoc'h va adversite, va douç koant ma permetfet

Me ne felle ket din diskoursi nag ambuzi an amzer
da konta deoc'h va adversite ag eun dam doc'h va miser
ag er fin beza priejou setu enon va destin.

- O va eskuzit, den iaouank me ne meus ket ar pouar
Da kozeal en ho presanç deus feçon a veritit
Me ne on ket komz gant eloquanç a biskoas ne meus deske

Me karche kaout an avantach a me ar pouar
da veza rouanes d'ho speret mez allas me zo dister.

- Ma mestrez, na n'ho assuri c'houi c'heus an oll
pouveriou
Deus a kement poan a santan c'houi a kaffe remejou
Red e lavaret e vec'h kri mar languissit ahanon

- 194 -

- Ne ve ket me ar fumelen o lesfen sur languissant
 Mar ven kapab en eb feçon da soulaji ho tourment
 Me meus aon eus eur godisser a trahissa(sid) ho se

(Ilis) Kupidon a goulenn gant kalz dimeus a astro
 Da distro var va c'honsianç a galon nag a komzou
 Me en tou gant fidelite va haris a me o karo

Konsiderit ta, tud iaouank, an amitie an daou-man
 Pere e voa ar fidelite a voa entre en daou man
 pe eo deud ar goal deodou zo koz do dispartia

- Debonjour dohui, merc'h iaouank,
 Debonjour deoc'h, va mouerep koz (eun tra bouez a
 Var sujet va servijer, c'hui a zo deus ar vro se,
 enn a zo eun den prudent a meulet en he c'hontre.
 en a zo eun den prudent, eun den a speret memes
 Mes prest he da kaout goall vrud ma ne kar lakat e

- Lavarit din, va mouerep koz, evid petra signifi
 dra ze
 pel zo abaoe voan klasq unan a kontche din e zoar
 Mil aont e meus na ve goass koant hag e fesson a z

- Ma merchic, flatal an dissou, karet a ra ar merc
 eva gwin a feneanti, eur butuner obstinet.
 Me meus (aman) da klem (a zech) balamour de (regar

Rag ze, va merc'h ma nem sentac'h e dilissou an der
 en komzou kaer a voar da laret mez ma vouifet e zc
 (Awel e) evid se ar barti, vouit goude e regreti.

- Lavarit dean, ma mouerep koz, ne deui mui dam gc
 Poan a ra dam daoulagat memeus amant de goëlet
 Na (neus) henor na profit da rei pen deus ar voaze

Neb a n'deus komposet ar sonn a zo en ken bras dar
 a zindan koler ar goal deod e fortun zo e c'hober
 ne man ket sur en nehamant gant aon e vellet affer

A me promet an assuranç, ma viche barner da pledi
 pe eun tad eus an illis a konduje ar goal deodou
 d'ho kondamni dar suppliç

~~~~~  
 vvvvvvvvvv

Christoph koz, kemener e Plouenan, 20 janv. 1851

~~~~~  
 vvvvvvvvvvvv